

**BUEZ PE GWERS
SANTEZ UJENIA,**

GWERCH'EZ HA MERZEREZ;

Mui anavet dre ann hano a

SANTEZ THOUIN AR MOR.

*Ann hano-ze, hervez ma lerer, a deu d'ezhi euz
ann otro THOUIN, meurbed devot d'ar Zantez,
pehini a zikouras ornin ar chapel a zo bet
zavet e Plouha, emm enor d'ar Zantez.*

Gret gand

J.-P.-M. L.

Hon Zalver en deuz lavaret :

« Ann neb am c'hask, em c'hav bepred. »

Math. 7. 8 (euz ar vuez 48^e v.)



MOULET E LANNUON,

ENN TI AR GOFFIC, MOULER HA LEVRIER.

1857.

APPROBATION.

Saint-Brieuc , le 1^{er} décembre 1836.

MONSEIGNEUR ,

J'ai examiné la chronique de la *Vie de Sainte Eugénie*, mise en couplets bretons, et le cantique qui la suit en l'honneur de la même sainte, et je n'ai rien trouvé dans ce travail qui s'oppose à ce que vous en autorisiez l'impression.

Je suis avec respect,

Monseigneur,

De votre Grandeur .

Le très-humble et très-obéissant serviteur,

AUFFRET ,

Vicaire-Général.

NOUS ÉVÊQUE DE SAINT-BRIEUC ET TRÉGUIER ,

Sur le rapport ci-dessus de M. l'abbé AUFFRET, notre vicaire-général, avons permis et permettons d'imprimer la chronique de la *Vie de Sainte Eugénie* et le cantique qui la suit.

Donné à Saint-Brieuc, le 4^{er} décembre 1836.

† J.-J. PIERRE ,

Évêque de Saint-Brieuc et Tréguier.

Par mandement :

RAULT ,

Chanoine , Secrétaire.

BUEZ PE GWERS SANTEZ UJENIA,

Gwere'hez ha Merzerez.

SKLERIDIGEZ.

Santez Ujenia a oe ganet e Rom, tremen daou c'hant vla goude donedigez hon Zalver, ha merzeriet er memes ker, er bla daou c'hant seiz hag hanter kant.

Ann Iliz a ra he goel ar bemped oar 'n'ugent euz a viz kerdu. E Plouha e rer he goel ar c'houzekved euz a viz me, dre urz ann otro Kaffarelli, eskop a San-Briek.

He buez a lenner er Brevial Romen, ann unnekved a viz gwengolo, e buez Zant Prot ha Zant Hyasinth, he daou servicher; e buez ar Zent, skrivet gand ann tad Ribadeneira, jezuist, hag e skrid ann otro Gaume, hanvet ann taer Rom, etc.

Oar don *Gwers Zantez Jenovefa.*

Krouer ar bed hag ann envo,
Peger braz eo ar burzudo
Hoc'h euz gret luguerni bemdez
Er re a glask ho karantez !

Fulup oa tad Ujenia,
Hag he mamm a oa Klaudia.
E ker a Rom e oe ganet,
Ha barz er fals kredenn zavet.

Mes Doue, 'n'he zevalijen,
A ra para ar sklerijen ;
Hag Ujenia, ma Doue,
Zo renket gand ho pugale.

He zad oa senator romen,
Meurbed roet d'ar fals kreden,
Hag he mamm eunn itron brudet,
E skeud fals doueo zavet.

'N'he sekrejo oa gant Doue
Merket a beb eternite,
E vije bet he zad hanvet
Enn Alexandri da brefet.

Evit ober eur gristenez
Gand Ujenia paganez,
Doue en deuz he digaset
D'ar vro-ze leun a dud disket.

Ujenia, iaouank ha pur,
N'anav ket c'hoas prins ann natur ;
Pleget e deuz gand he zado
He fenn dirag ann doueo.

He dorn, gant kalz a largentez,
En deuz roet d'ann droug elez,
Ann ezens a dlee eunn de
Devin dirag ar gwir Doue.

He zad en doa, boe pell amzer,
Roet d'ezhi daou servicher,
Prot hag Hyasinth, paganet,
Gant gras Doue ive galvet.

Ujenia , lemm a spered ,
Ha d'ar studi roet meurbed ,
E deuz, gand he daou servicher,
Darempredet skoliou ar ger.

Mez holl studi ann dud disket
A lez he spered trubullet ,
Ha dre ma tisk ar skiencho ,
E tispriz ar fals doueo.

Kavout ra tenval he c'hreden ,
He spered a glask sklerijen ;
Mes Jezuz en deuz lavaret :
« Ann neb am c'hlask em c'hav bepred. »

Kerkent ma wel o lugernin
Ar c'hras ouz he sklerijenin ,
E sant he c'halon o tomman ,
Pedin ra Krouer ar bed-man.

Ho zri, kuzullet gant Doue ,
E klaskont prest ar wirione ,
Ha renet gand ho elez mad ,
E kayont d'ho ine eunn tad.

Renet enn hent ar sklerijen
Gand eunn Eskob hanvet Helen ,
Ho deuz prest al lezen disket ,
Ha gand Helen int badcet.

Pastor mad ha karantezus ,
Pegement ezoc'h truezus !
Ho madelez a ia bepred
Da glask ho tenved dianket.

Kerkent m'en deuz ann dour bade
Gwalc'het ho fenn hag ho ine,
Holl joa, holl dudi * ann envo
Ho deuz karget ho c'halono.

Piou hallfe breman, ma Doue,
Disklerian joa ho pugale !
Ho c'halono a zo beuzet
Ebars eur mor a joausded.

Ann tan a garantez Doue
En deuz ken tommet ho ine,
Na gavont mui, ebarz er bed,
Nemet tromplerez ha moged.

Evit sonjal mui enn Doue,
Euz ker e tec'hont da vale ;
Doue ho ren 'nn'eul lec'h distro,
'Vit komz gwel ouz ho c'halono.

Enn eul lec'h gouez ho deuz klevet
Eur gan melodius meurbed :
Menec'h a glevont ho veulin
Ho C'hrouer hag ho Mestr Divin.

Ujenia, 'n'eur skull daero,
A lar : « Ma Jezuz, ma Otro,
» El lec'h-ze, 'vit ho servichin ;
» Gret ma digemer, Mestr Divin. »

Ujenia e deuz pedet,
Ujenia zo degizet,

* Dudi-laouenidigez.

Mont ra gand he zervicherien,
Trezeg abatti Zant Helen.

Ar Zant, gand ann env kuzullet,
Ar Zantez en deuz anavet ;
Mez urzet eo gand hon C'hrouer
D'ann abad zantel ho c'hemer (1).

Doue, gant nerz ha karantez,
En deuz a beb peurbadelez,
Renet pep tra oar ann douar
Evit hon mad ha 'vit he c'hloar.

Piou hallfe breman lavaret
Bonher ar Zantez binniget !
Rak kant 'vit unan beb mare
A ro Doue d'he vugale.

Graso ar spered binniget
Enn he c'halon zo diskennet,
Evel eur glao skan d'abarde,
Pe 'vel glizennik ar beure.

Ann oll, ebarz enn abatti,
A ro da Zoue melodi,
Da vezan digaset 'nn'ho zouez
Ar burzud-man a zantelez.

Karet Doue hag he nesan,
Renti servich da beb unan,
Bevan ebarz enn izelded
A oa hec'h holl studi bepred.

(1) Ar zantez a gemeras ann bano a Ujen.
* Peurbadelez-eternite.

Evel eunn douar frouezus ,
He e'halon a doug frouez meulus ,
Ar zantelez , ar burete
A ra kurunen hec'h ine.

Ann natur , dre nerz he feden ,
Abred en deuz pleget he benn ,
Ar re boaniet zo frealzet , *
Ar re glanv a gav ar iec'hed.

Fulup , ekeit-ze dre ar vro ,
A glask he verc'h , a skull daero ,
Hag e palez ar gouarner ,
Nemet hirvoudou na glever.

Mez Helen en deuz brezeliet
Ar brezel mad ha binniget ,
Galvet eo bet d'ar gwir bonher ,
Ha kurunet gand he Grouer.

Na glever barz enn abatti
Nemet gwelan hag hirvoudi ,
Ann holl venec'h zo glac'haret
D'ann abad zantel tremenet.

Mes, 'vel eunn tad karantezus ,
Doue , bepred madelezus ,
P'en deuz gand eunn dorn kastiet,
En deuz gand eunn all frealzet.

Ann oll venec'h zo e peden
Evit choaz eunn abad d'ho ren ,

* Frealzet-konsolet.

Ha prest ec'h int karget a joa,
Doue a choaz Ujenia.

Ujenia p'e deuz klevet,
E oa gand ann envo choazet,
A zo prest stouet d'ann daoulin,
'N'eur skull daero, 'n'eur hirvoudin.

Mantret braz e lare bepred
Ebars 'nn'he c'halon trubullet :
« Penoz e c'hellet, ma Doue,
« Ma choaz 'vit ren ho pugale ? »

Dre m'eo zavet enn enorio
E kresk nerz hec'h oll vertuio,
He zantelez hag he douzder
A c'hone kalon he breuder.

He zantelez zo ken brudet,
M'ez et a bep lec'h d'he gwelet ;
Ha Doue, dre he fedenno,
A skull oar ann oll he c'hraso.

Etouez ar re oa diredet
Evit klask ha kaout iec'hed
E oa ann itron Melansi,
Brudet e ker Alexandri.

Leun a iec'hed, a joausded,
Ha gand ann drugarez renet,
Goude, oar hent ann abatti,
Liez e welet Melansi.

Mez evel eul loen gonaret,
Satan enn dro dimp zo bepred,

'Vit hon tizout enn he becho,
Hag hon teurel enn holl reusio. *

Barz er galon-ma, ker roet
Da direizo ar baganet,
En deuz prest he alan flerius
C'houezet eunn ezen belimus.

Melansi troumplet, gonezet,
Abred ann tu e deuz kavet
Da dizoloin ar gouli
Ra 'nn'he c'halon al louzdoni.

Gand euz e respount ar Zantez :
, Ine fall, mar na zistroes ,
, Te vo gant Doue kastiet ,
, Hag enn tan ann ifern spluiet. »

Evel ma ra iudal he vouez
Eul leon heb magadurez,
E krias neuze Melansi
E oat ouz he dismegansi.

Evel Jozef, den ker brudet,
Ujenia zo tamallet,
Hag abred beteg ar barner
Melansi a gas ann afer.

Ar Zantez, e gaou tamallet,
Hag hervez al lezen galvet,
A deu gand he daou servicher
Dirak kador varn ar rener.

* Reusio-malheurio.

Ar gouarner, ru tan fachet,
Ar Zantez en deuz rebechet,
En deuz hanvet ar gristenien
Diskibien fall ar fals lezen.

Gand ar spered zantel skleriet,
Ar Zantez e deuz respountet :

« Da devel e zo eunn amzer,
» 'Vel da laret pez a ouzer. »

« O pried zantel d'am ine,
» O ma Jezuz, o ma Doue,
» Ret vezo 'ta d'in lavaret
» Petra guzen 'vit ho karet.

» Mes, kent 'vit en em diskullan,
» Ouz ar barner e c'houlennan
» Ma vezo espernet bepred
» Ann hini e deuz ma duet.

» Euz eunn ober ker rebechus
» E gwirionez n'ounn ket kablus,
» Rag ma reiz em dalc'h e gwarez
» Ouz eunn henvel fallagriez. »

A-boan e deuz he gir laret,
He dorn he zae * en deuz roget,
Hag he bruched ** a famelen
A zav enor ar gristenien.

Kerkent e klever barz enn er
Eunn estlamm a joa, a vonher,

* Zae-habit.

** Bruched-poitrin.

Melansi a zo disprizet ,
Ujenia meurbet meulet.

Neuze e laras ar Zantez ,
Gant kalz a deneridigez :

« Ma zad ker , chetu c'houi kavet
» Ar bugel ho poa bet kollet. »

« Doue en deuz , gant karantez ,
» Ma c'hasket barz em faourantez ,
» Ma renet d'ar gwir sklerijen ,
» Ha ma maget gand he lezen.

» Leun a c'hras , a doujans Doue ,
» Dira-z-oc'h e welet ive
» Ann daou den ho poa bet karget
» D'am diwall ha d'am ren bepred.

» Renet gant madelez Doue ,
» Hon doa , etouez he vugale ,
» En em guzet 'vit hen karet ,
» Hag hen servichin 'vit bepred.

» Mes evit diskouez ha zével
» Holl furnez he lezen zantel ,
» En deuz bet lezet hon C'hrouer
» Hon tamall gand eur sort duder. » *

P'e deuz diskleriet he buez ,
Ann holl a zo leun a zouez ,
Ha dija , beteg ann daero ,
Ez eo piket ar c'halono.

* Duder-mechansete.

Fulup, 'vel m'en deuz anavet
He vugel ar muian karet,
En deuz nijet d'he briata....
Ann holl a skull daero a joa.

Karget a joa, a levenez, *
Ann holl ho deuz, bars enn eur vouez,
Meulet Doue ar gristenien,
Ha meulet furnez he lezen.

Mes, gant gras Doue labouret,
Dija Fulup a zo trec'het,
Dija he galon, he ine
Zo tommet ouz ar gwir Doue.

Barz eur mor a wir joausded
Ar Zantez abred zo beuzet,
Rag he daou vreur, he mamm, he zad
A c'hone da Doue 'vit mad.

Ann impalaer, meurbed fachtet,
P'en deuz ar c'helo-man klevet,
A laka Fulup d'ar maro,
Ha Fulup a ia d'ann envo.

A-bred d'he zud e deuz disket
Follentez enorio ar bed,
Distrein a reont holl d'ho bro
'Vit n'em rei d'ar madobero.

Ho madobero hep niver
A gresk e Rom ar gwir vonher,

* Levenez-laouenidigez.

Ar re baour a zo zikouret ,
Ar baganet sklerijennet.

'Vel eur stereden lugernus ,
Eur zantelez ker dudian
A sklerijenn hag a c'hone
Kalz a werc'hezad da Zoue.

He daouarn , kaer dre ar glanded ,
Ho deuz , noz ha de , besiet
Holl merzerien ann oan divin
'N'eul lec'h kuzet euz he jardin.

Mez ann droug el , p'en deuz gwelet
E oa he ren er bed gwallet ,
En deuz prest c'houezet ar goler
Ebars skouarn ann impalaer.

Raktal eneb ar gristenien
Gallien a doug eul lezen :
Ar Zantez a zo chadennet ,
Prot hag Hyasinth prizouniet.

Treinet dirag ann doueo ,
Ar Zantez , dre he fedenno ,
E deuz ho rullet ha torret ,
Hag ann templo e poultr laket.

Neuze , 'nn'he goug eur min pouner ,
Ez eo prest tolet enn eur ster ;
Mez ann dour he doug oar ann trez
P'en deuz zantet he zantelez.

Ar Zantez goude zo strinket
Enn eur fourn a dan fuloret ;

Mes , 'vel tri bugel Babylon ,
Barz enn tan e ped a galon.

Neuze , 'vel he daou servicher ,
'N'eur prizoun tental he zoler ,
Ha dek de , hep magadurez ,
E lezer eno ar Zantez.

Mez holl boanio ann tri merzer
A zo kountet gand ho C'hrouer ;
Hag ho zri , dre doliou kleze ,
Ho deuz nijet da c'hloar Doue.

Etouez ar c'horfo binniget
E doa bet ar Zantez besiet ,
Ez eo Zantez Ujenia
Besiet gand he mamm Klaudia.

Kouskoude bepred glac'haret ,
Klaudia bemdez zo gwelet
Oar bez he merc'h oc'h hirvoudin ,
O skull daero hag o pedin.

Eunn de , pa bede oar ar bez ,
E kleo hag e wel ar Zantez ,
Hag he c'homz leun a joausded
E deuz abred he c'honfortet.

« Lezet ho kaon , bezet joaus ,
» Me zo gant Doue evurus ;
» C'houi bars disul vezo ive
» Gan-en enn baradoz Doue.

» Disket da c'heull kroaz hon Zalver
» Serj hag Avitus , ma daou vreur ,

» Ha gan-e-omp, er joausded,
» Ho devezo lod 'vit bepred. »

Hervez ma laras ar Zantez
Ez eo c'houarvezet ann digouez,
Hag holl ho deuz d'ar baradoz
Nijet gant Doue da repoz.

O ! Gwerc'hez meurbed evurus,
Ujenia karantezus,
Hon zikouret enn hon poanio,
Hon renet enn hent ann envo.

Evelse bezet gret.

KANTIK
ENN ENOR DA ZANTEZ UJENIA,
GWERC'HEZ HA MERZEREZ.

Oar don *Euz a Vari*, gant *melodi*.....

DISKAN.

Barz er poanio,
Ann danjerio
A gavomp ebarz er bed,
Deut d'hon zoutenn,
Ha d'hon difenn,
Ujenia binniget.

'Vel ar stered ,
Skedus meurbed , *
A gaera bolz ann envo ,
Graso Doue
Deuz oc'h ine
Ornet gand ar vertuio.

Ho santelez
Hag ho furnez ,
Kaer evel diou lilien , **
Ho deuz hadet ,
Ho deuz plantet
Enn dro dec'h ar gwir lezen.

Jipsianed
Ha Romaned ,
Holl e laront, enn eur vouez ,
Ann obero ,
Ar burzudo
Oc'h euz hadet enn ho zouez.

Ann dud poaniet
Hag heb iec'hed
Oc'h euz , dre ho pedenno ,
Ha frealzet ***
Ha diboaniet ,
Gret tridal ho c'halono.

* Skedus-brillant.

** Lilien-fleurdelizen.

*** Frealzet-konsolet.

D'ar baganed
Oc'h euz disket,
Ekreiz ho zevalijenn,
Hent ar furnez,
Ar zantelez,
Hag hent ar gwir sklerijenn.

Ho vertuio,
Hoc'h obero
Gand ann env a zo kountet,
Ha, merzerez
Ar gwir furnez,
Enn envo c'houi zo renket.

Gant madelez
Ha karantez,
Ujenia evuruz,
Hon c'honfortet
Hag hon sturiet,
Hon renet da c'hloar Jezuz.

Evelse bezet gret.



